



Photo Charrouin, St-Pol-de-Léon

Diwallit potred !



Photo Charrouin, St-Pol-de-Léon

SON NEVEZ
savet gant

Francis MORL ha François STÉPHAN, daou ganer kastellad

I

Selaouit kana, va c'henvroïz
Ar son am euz savet e va giz
An dro-man diwarbenn ar Merc'hed
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

II

Ar Merc'hed en amzer a vreiman
Zo tud dirollet ha pennou skanv
N'ouzont nemed furchal ha redet
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

III

Evit prena ho gwiskamanchou
E trebont ho gounidegeziou
Lostennou seïz, boutou vernisset !
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

IV


Er pardoniu hag er foariou braz
E vez ganthro bleud riz leïz ho fas
Ho malvennou ive vez duet !
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

V

Eur bern traou ruz ouz ho muzellou
M'oarvat evit dousaat ho fokou !
Chadennou aour ha mountr alaouret !
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

VI

Merc' hedigou a zo ken kluvan
Ma n'ouzont ket zoken ober tan
Na skuba 'n ti, nag aoza boued
Diwallit, Diwallit mad, Potred !



VII

Ar re-man 'vad a zo barrekoc'h
Da esa touellaat ac'hanoc'h
Ha mar gellont e vezoc'h kollet
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

VIII

Pa 'z it d'ar Pardoniu da bourmen
Ouzoc'h ez eont da c'hoarzin laouen
Taoliou lagat ha sellou daonet
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

IX

Ganeoc'h ez eont kichen ar staliou
D'o lakaat da baea madigou
Gantho oc'h arc'hant vo dispignet
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

X

Ha pa vo, dispignet oc'h arc'hant
E vezint o c'hoarzin dizamant
A gostez neuze vezit lezet !
Diwallit, Diwallit mad, Potred !

XI

Ar gwella tra a rafec'h d'ezo
Eo kas ar merc'hed divar o tro
Pourmenit gant o kamaraded
Ha diwallit mad diouz ar merc'hed.

(Reproduction interdite.)